

## PARDON DE NOTRE-DAME DE GLEDEN



I)

- |  |   |
|--|---|
| 1. Pardonerien, deut da Gleden<br>Da enori ar Verc'hez<br>Kinnigom d'ezi or pedenn<br>Ha kanom oll asamblez.               | O ITRON VARIA GLEDEN<br>BENNIGET O PUGALE<br>DEUS AN MENVOU DEUT D'ON DIFENN<br>D'OR SIKOUR E PEP MARE                      |
| 2. Gout a rit, o Mamm benniget<br>Eo bras or sempladurez<br>Nemet ganoc'h vem skoazellet<br>Koueza sur raim aliez.         | 3. Deut 'ta gant o torn galloudus<br>D'on harpa ha d'on difenn<br>Evit ma vim krenv ha nerzus<br>Enep on enebourien.        |
| 4. Kant ha kant gwech pelerinet<br>'vit o'hory hag o ene<br>O veza d'oc'h en em voestlet<br>O deus kavet ar pare.          | 5. Kement den a zo e glac'har<br>Ni ho ped, Gwerc'hez Vari<br>War ar mor pe war an douar<br>Deut buan d'er c'honsoli.       |
| 6. D'ar c'hlanvour kez war e vele<br>Dalc'hit, Mari, da c'houlenn<br>Gras ha sikour digant Doue<br>Da herzel ouz e ankenm. | 7. Ha d'ar be'herien kaledet<br>Grasou ar gonsersion.<br>D'or c'herent ha d'or mignonet<br>Roit dalc'h mañ protecsion       |
| 8. Grit ivez, or Mamm benniget<br>Eur zelle leun a garante<br>Ouz an dud a zo dibabet<br>D'on hentcha a berz Doue.         | 9. 'vit on Tad Santel, Mamm dener<br>Ni ginnig d'oc'h or pedenn ;<br>Beillit warnan e peb amzer ;<br>Trec'hit e enebourien. |
| 10. 'vit or Bro ni deu d'o pedi<br>O Mari, or chelaouit,<br>Ar peoc'h a nevez roit d'ezi<br>O Mari, e zikourit.            | 11. O Itron Varia Gleden<br>Hed or bu' beilhit warnom<br>Ha dreist pep tra war on tremen<br>Mamm dous, pedit evidom.        |